



GUERZ

Var sujet eur femelen manet Intaneyz

Gant peyar Buguel

Var ton : Cantic ar burete

Ni o suppli tud devot
Dont da silaou a galon
Ur c'hantic truezus
A dourcho ho calon :
A zo grêt d'eun intanvez
Dèmeus a Breis-Izel
O qimiadi oc'h e mab
Partiet d'ar brezel.

Qement a gléo ar vers-mâ
Hag a rîi reflection
A zo crioc'h evel cur leon
Ma ne al dont da ouela
Pa entento e lenn
Oll dont da sonjal
Ne deo guir gristen.

signalé dans Olivier

Drindet santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin
Me ho ped r̄i sicour d'ho servicher indign ;

Va speret a zo frajil, ha va studi izel,
Velèc a c'houlennan ouzoc'h, Drindet Santel,

Guerc'herz Vari, dēc'h en em a Iressan :

Obtenit din ar memoar evit ellout riman ;

Pa gompreñan ar sujet a ra din scuill daelo,

Me gred-a vezo mantret oll qement a c'hlêvo,

Cruelloc'h e zomp êru evit tirantet

Pere laqas d'ar maro hor Zalver beniguet ;

Ne zeus tam humanité etouez ar gritennien ;

E zit da velet ractal eus a breven.

Me gomz ouz eur femelen enz Escopti Dol,

A voa manet intavez, e hanno Anna Bol ;

Pêvar eus a vugale a chom gant ar vrez-se

N'oqet oas achus pemp blas ar c'hossa anë

E daou yaouanka a voa n'o guele languissant ;

Sômjomp ebars er vizer hao ebars en tourmant

E deveus bet ar vreg-man gant e hugaligou,

Hep cavet tam zicour digant den eus ar vrô.

Qement tam meUBL e voa a yoerzas prontamant,

Evit allout r̄ei souten d'e fevar innoçant ;

E zamouigou dillet prest gouze a voerzas ;

Truezus voa e guelet cazi ebars en noas,

Bremàn var tamic lous en eur c'horn eus an ti

E renq monet da repos, e bugale hac hi,

E daou buguel languissant a zo êt gant Doue,

Hac hi chom paralitic qerqent var e gu-le.

E inab hena a lavar ; me ya da zervichi,

Ha qement a chonein vo vit ho soulaji :

Lavaret a ra d'e vreur : bez soign diouz hor mam guéz ;

Hit da glasq dëi tamou bouet, ha n'ho po qet a vez.

E mab hena neus cavet eur gondition vad;
Mes qement a c'hozée a laq en dilat :
D'ar gloar ha d'ar vanite e zè en em livret,
Ne songe qet en e vam var e guele chommet.

E mabic anter-hena à voa ganti chommet,
Hac a yè bemde endro da glasq dei tamou bouet;
Soigni ré e vam bemde, ha goalc'hi e dillat
Ema eo guir melezcur a vugaligou vad.

E mab hena voe en oad da denna d'ar billet;
Mes dre m'oa mab intanvez e zeo bet exantet
E vreur, e blavez goude, en deveus bet tennet,
D'accomplissa ar glac'har an numéro isel en deus bet.

Brêma e retorñ da guer hac e galon mantret,
P'érn e qichen e vam calz daelou n'eus scuillet :
Va mamic paour, emezan, petra refor brêma ?
Me meus numero izel hac a renq partia !

E vamic paour en consol gant comzou douç meurbet,
Va buguel qèz, emezi, n'en gonformi zo ret ;
Bezit propr ha den honest, grit ervat ho tever,
Ha me a bedo Doue d'am gonsoli er guêr.

Iavarat a ra d'he vam da gaout va greur me ya
Vit e bedi ur veach qent partiat ;
Ta rhei dec'h un dra benac ur vechic an amzer,
D'ho soulaji, va mam baour, ebars en ho mizer.

P'érn e qichen e vreur, e lavaras deàn,
Me meus bet eur billet du, hac a renc partian
Ho pedi ran, va breur qès, da rhei un dra benac
Da soulagi or mam paour, a zo quer miserabl !

E vreur a respont deàn : na zeu qet var va zro
D'interrompi a c'hanon gant da finesscou :
Qëntoc'h eguet da gredi, me c'houl bea ractal
Rentet amâ var plaç bouzar ha mud ha dall.

Accordet e voa deàn pez en doa gouennet
Rentet ha dall ha bouzar, ar gomz en deus collet,
Rentet e zeo malheurus bete fin e zeyou ;
Evit e funissa deus e voal proposiou.

E vreur evel m'er güelâs bars er stad-se rentet,
A zo retornet d'ar guêr hac e galon mantret ;
Va breur eo'r maleürussa a guement zo er vro.
Demeus ur seurt accidentant Doue d'hon preservo.

Dal ma meus laret deàn rîi un dra bénaget,
Da zoulaji va mam baour, en coler e zeot êt ;
Gouennet en deus bea bouzar ha dall ha mud ;
Bet en deveus e c'houlen digant crôuer and dud.

E vam a lavar deàn : na veles qent bed
Doue a visericord da rîi did ar güelet.
Gouzout a rit, va buguel, Doue zo eun Tad mad ;
Hac a bardon ar pec'her demeus a galon vad,

Pa voa ar vam desolet d'ar buguel o prezeg
Eur jandarm ebars an èi a zo bêt entreet
Da rîi dean e vultin da partial ractal,
Ema zo bet dê o daou an divea glac'har

A vam baour ol desolet a lavar d'e buguel!
Deus c'hoas etre va divrec'h ur vech qentvit mervel
En em boqat a revjont en eil hac eguielle;
Ranna rèje ar galon a glâvje aneze.

Ar buguel - mân desolet a lavar d'e vam guèz:
Bet on o clasq dêc'h sicour ebars en amezeguez;
A boan euz va zelaoue ha priset va c'hlêvet ;
Evelse, va mainic qez, c'houi yo abandonnet !

E vam a lavar deàn : partiit va buguel,
Hà va lest en gloar Doue. . . ret e vezò mervel,
Serrit an nèr var va c'hein cassit an ale'hoe.
En eur c'horn eus an ilis em c'hefot goude ze.

Question e voe brema d'ê d'en em separé;
Pitoyabl e voa clèvet ar c'hri a voa en ti,
Adieu dêc'h, va mamic paour, a lar ar buguel qêz,
Ranna a ra e galon pa voa e mont er mêz.

Alc'hoeet en deus an nòr var e vam languissant,
Mont a ra gant e alc'hoe d'an illis prontamant :
Laquat eure aneñ var gornic an auter ;
▲ze meân, m'en cavo, ma tistroân d'ar guer.

Stoui ra var e zaoulin en ilis beniguet :
Goulen a ra ur mennat digant Salver ar bed :
Accordit din, va Doue, ma teuin da velet
Enterri va mamic paour pa vezo decedet.

Cetu-ên ta partiet da vonet d'an arme ;
E vamic paour ar varvas pemzee devez goude ;
Ar c'hleyer eus ar barros a zon dezi glazou,
Hac e guntinu nòs de hep caout den var o zro.

Accordet e voe deân pez en doa goulenet,
Anter gant leo demeuz ar guer ar c'hleyer neus clèvet,
Larat ra de gabiten : Va maznic baour zo maro
Me gléo patant ar c'hleyer o son dezi glazou.

E gabiten a lavar : Eur miracl bras e ve
Clevet cleyer ho parros hanter cant léo anê,
Larat ra de gabiten qemeret un tam,
Ha c'houi glêvo aneze aman qercoulz ha me.

E gabiten a lavar : Me o c'bléo coulz ha te ;
Me royo dit, va buguel, bremanzon da gonje
Ma zi d'ar guêr da velet enterri da vam guez,
Rac gout a ran da galon zo en trisdiguez.

P'en devoa bet e gonje e vale nos ha de,
Eruout a ra er guêr hep na voe pell dale ;
Monet a ra d'an ilis, ma stou var e zaoulin
Da drugarecat Doue eus e c'hraçou divin.

Pa voe êchu e beden e qemer an alc'hoe
A dal ma tigor an nôr e sell ouz e güelc
Ma kave e vam baour maro, varni en em dolas,
Gant ar glac'har en devoa e galon a rânnas.

An nôr voa manet digor, tud a zo antreet,
Ma cavyout anê o daou var ar plous decedet;
Monet a rejont ractal da gavet ar Person
E vit annonci deân an désolation.

Ar Person ro lincelliou evit o liena,
Hac e ped ivé an dud da zont d'o assista
Enterret e voent neuze gant peb solennite,
Laqet o daou assembles ebars er memes be

Guelet oc'h eus va breuder portret ur buguel mad,
Accordet e voe deân gant Doué e vennad
Heuillet en devus bêpret Gourc'hemannou Doué:
Qemerit en evit squer me ho ped bugale.

Composéset gant Renc ar Bars a Landreguer

Propriété



AR VAM MICHEL

Var ann ton : TRA, LADIRA

—o—

Ar vam Michel siouas he deus de c'haz collet,
Dre ar prenest he iou piou enn deus enn cavet,
Aar c'homper Lustucru, dezhi respontas,
Tavis ar vam Michel, n'eo qet collet ho caz.

Var ann ton, tra, ladira, var ann ton, tra ladira
Var ann ton, tra diri, diri, dira, ra, la, la!

Ar Vam Michel dezhan ractal he deus laret,
Va c'haz n'eo qet collet, neuze peuc'henn cavet,
Ar c'homper Lustucru enn deveus respontet
Rohit um dra benag ha deoc'h he vo rentet.

Var ann ton, tra, ladira, var ann ton tra, ladira,
Var ann ton tra, diri, dira, ra, la la!

Ar vam Michel lavar desidet hon da ze,
Ma rentit d'inn va c'haz he poc'h ur poq fet-de.
A c'homper Lustrucru, p'hini n'he c'hoantat qet,
Lavar evit ur poq ho caz a zo guerzet.

Var ann ton tra, ladira, var annton tra, ladira,
Var ann ton tra, diri, dira, tra, la, la!

Neuze ar vam Michel ha antrenn eun furoll,
Beteg he di hè c'ha hag enn galv coz horoll,
C'houi he peuc'h enn laeret he mezhi malotrenn,
Me n'ur glemmo d'ar Mear hag he poc'h cabanenn.

Var ann ton, tra, ladira, var ann ton tra, ladira,
Var ann ton, tra diri dira tra, la, la !

Laquet deus Gallec en Brézon nec gant,

VISANT COAT.